


MEDISIN ODILOÑ



EMGLEO BREIZ - AR HELENNER

Bet lakeet e brezoneg gand
Charlez ar Gall

Gand aotre hegarad **Odilon**
27 Grande Rue, 89300 Champlay.



Bet embannet gand skoazell **Skol Uhel ar Vro**

I.S.B.N. : 2-900828-34-1

Bet disklêriet hervez al lezenn: kenta trimiziad 1986.

Peb gwir miret striz.


Bet moulet gand **Mesidou**, 40 ru ar Republik, 29200 Brest.

Bet embannet gand **Ar Helenner**, 30 ru Racine, 22000 Sant-Brieg.

LEVRAOUEG BREIZH

Demad,
va ano a zo Odiloñ
hag ar mintin-mañ
emaon o vond da gavoud va medisin
abalamour em-eus poan
em horv a-bez, koulz lavared.
Med, pas re an oll memez tra.


Va medidin,
me 'anavez anezañ mad.
N'emañ ket pell diouz va zi.
Chentil-tre eo.



Ar medisin n'emañ ket er gêr.
Eur gwaz hag eur vaouez
a zo o hortoz o zro.
Ar vaouez a lar din ez eo eet ar medisin
da weled eur plahig
hag a zo klañv, klañv-braz.

Dao eo din gortoz ive.
Kasaüz a-walh eo.

A! kleved a ran trouz.
Ar medisin, sur a-walh eo a zo o tond.



Nann, n'eo ket ar medisin an hini eo,
med eur vamm-goz.
N'eo ket kontant anezi
abalamour e ranker gortoz.
Ne lavar netra.
Skuiz braz eo kazi sur.

A! kleved a ran trouz.
An taol-mañ
ar medisin eo a zo o tond.




Sell 'ta! Eur paotr bihan an hini eo.
Mond a ra da azeza ha gortoz evel ar re all.
Ar vamm-goz a lar d'ar vaouez all
ez eo deut da weled ar medisin
abalamour ne gousk ket mad, en noz.
Ar paotrig ne lar netra.
Trouz a ra gand e dreid.
Ar vaouez a lar d'ar vamm-goz
ez eo deut da weled ar medisin
abalamour ez eo dalhet gand ar boan benn.
Ar paotrig ne lar netra.
C'hoari gand e zaouarn a ra.



Ar gwaz a lar
e-neus atao paon gov.

Ar paotrig ne lar grik ebed.
Ne hoari ket ken gand e zaouarn.
Ne hoari ket ken gand e dreid.
Ne oar tamm ebed ken petra d'ober.


Me, avad, am-eus eur zoñj.
Mond a ran beteg va zi, n'emañ ket pell.
Mond a ran da gerhad
eun dra bennag da hoari.



Setu.
Eur staliad traou 'zo deut ganin.

Ar paotrig a zo fouge ennañ.
Desinet e-neus eun dra bennag
hag e-neus roet an dresadenn d'ar vamm-goz.
Ken laouen eo hi
ma en em lak d'ober eun dresadenn d'ar paotrig.

Ar gwaz a grog da hoarzin.
Ar paotrig neuze e-neus lavaret dezañ.
ne vefe ket, eñ, gouest d'ober
eun dresadenn vrao evitañ.







Ar vaouez a glask he zigaretennou.
A! nann em-eus me lavaret!
Ha me kentoh da ginnig dezi eur wastell.
Ar gwaz, emezañ, e-neus sehet.
Me a ginnig dezañ dour-dous avalou.
Ar henta gwech
eo dezañ tañva dour-dous avalou.
Mad eo!

Trouz a zo.
Sur a-walh n'eo ket ar medidin an hini eo!



Arsa 'ta! Piou a zo klañv? a houlenn ar medisin.
Morse ken ne vin klañv, eme ar vamm-goz,
rag me raio tresadennou pa deuo an noz
ha da houde e hellin kousked mad.
Morse ken ne vin klañv, eme ar vaouez,
rag echu eo ganin butuni.
Morse me, kennebeud, eme ar gwaz
rag me a evo atao dour-dous avalou.
Ha me, Odiloñ, a zo ken kontant,
ma en em zantan yah-pesk ive bremañ.
Hag ar paotrig, petra 'lar?
Tadig, emezañ,
bremañ e hellom mond da hoari polotenn.
E baotr bihan eo an hini a oa
deuet da hortoz e dad.



I.S.B.N.: 2-900828-34-1